

Meulodi

al Labourer



Meulodi

al Labourer



MEULODI AL LABOURER

Ar werz a zo aman war-lerc'h a zo bet savet, eun daou-ugent vloaz 'zo bennag, gand eur person eus paroz Skrignak (Penn-ar-Bed). En Montroulez, en ti Ledan, e oe moulet ar wech kenta. Kollet hag ankoueet e oa pell zo, pa 'm euz bet an eurvad da lakât an dorn war unan a vane c'hoaz en deûn Bro Gerne. Bis-koaz son gaeroc'h na oe bet savet war al labourerien en Breiz-Izel. Neb hi lenno a lavaro evel don.

JAFFRENOU.

*Labores manuum tuarum quia
manducabis, beatus es et bene
tibi erit. (Ps. 127, v. 2.)*

Abalamour oc'h euz debret labour
freuz da zaouarn, ez out
evurus, ha na arruo ganid
nemed vad.

I

Kanomp laouen eur ganaouen
En enor d'al labourerien
A vag bemde, dre o labour,
Ar pinvidik kouls hag ar paour.

Gwech-all goz ar batriarked,
Ar rouane, hag ar brinsed,
O flijadur evel o gloar
A oa labourat an douar.

Fors tudjentil, breman zoken,
Fors tud gwiek, fors bourc'hizien,
A zilez ar c'haera kargou
'Vid labourat o douarou.

Nag a zouar fall, dre ar bed,
O deuz ar venec'h goneet,
Ha chenchet en parkeier kaer,
En liorzou hag en prajeier !

'N o c'hreiz e savent kouenchou
Ilizou braz, hospitaliou
Evid louzaoui ar beorien,
Pedi, hag ober pinijen.

Ha hirio c'hoaz, an Drapisted,
Santela tud oufec'h gweled,
A labour laouen an douar
Hag ar bigell gand an alar.

Labourat a reont ken mad,
Ken laouen ez int eus o stad,
Ma c'hellont servija da skouer
Da gemend a ra ar vicher.

Impalaër ar Chin, bep bloaz,
A ya, gand lidou ha gouel braz,
Da lakât e zorn d'an alar,
Dre ma kav ar vicher dispar.

En hon bro, er maradegou,
E vez roet ive prijou
D'an neb a labour ar gwella,
Kouls ha d'ar zoudard hardia.

Micher rust al labourerien
A zo hag a vo da viken
Gwella micher a zo er bed,
Ar wella da vean meulet.

O micher a zo an nobla
Hag ive an talvoudusa,
Dre ma tigas da bep-unan
Boued, evach, dilhad, danve tân.

En despet d'o foaniou kalet,
'Int leun a nerz, leun a yec'hed,
Evurusoc'h, en o maeziou,
Evid bourc'hizien, er c'heriou.

Nepred d'eze ne vank labour,
Evel ma ra d'ar micherour
A weler o chom aliez
Pell braz da c'hortoz eun devez.

II

Al labourer 'barz ar maeziou
A wel, a dra zur, kaeroc'h traou
Evid na oufed da weled
Er vrasa ker evez ar bed.

Petra 'welfed er vrasa ker ?
Tier uhel, paleziou kaer ;
Staliou leun a horolachou,
A vezer, a c'hoariellou.

Tachennou braz ha re vihan
Ruiou striz ha ruiou ledan,
Hag, er ruiou-ze, o vale,
Tud oberiant pe didalve.

Er c'heriou braz, ne ve hini
O chom e-unan en e di :
En peb ti e ve bandennou,
Evel gwenan er c'hestennou.

Nag a drouz, nag a jolori
A vez eno da c'houzanvi !
Eno nepred, na de, na noz,
Na gaver na peuc'h, na repoz.

Eno an ear 'zo bulumet
Ha noazus, siouaz ! d'ar yec'hed :
Keriz a gar mond aliez
Da glask an ear vad war ar maez.

Eur bourc'hiz hag a c'hell sevel
Eur manerik pe eur c'hastel,
A zeu d'hen sevel er maeziou,
'Vid tremen ennan an hanvou.

Bemde al labourer a wel
An heol lugernuz o sevel,
Evid sklerijenna ar bed :
Petra 'zo kaeroc'h da weled ?

Epad an noz e wel al loar
'Vel eur rouanez leun a c'hloar,
En bolz an Nevou o kerzet
E-kreiz kant ha kant a stered.

Bep bloaz, e wel ar parkeier,
Ar c'hoajou hag ar prajeier
Leun a vleun hag a vokejou
Kaeroc'h evid diamanchou.

War ar bokejou-ze, e wel
Ar gwenan o tastum o mel,
Hag er gwez, goude bleun skedus,
E wel freuz mad ha dudius.

A bep tu e wel burzudou
Gret holl gand Roue an Nenvou :
Birviken an den na c'hallfe
Ober traou ken souëzus-ze.

Na laouen eo al labourer
O welet, an nevez-amzer !
E brajeier hag e barkou
Leun a foen hag e drevadou !

D'ar beure pa 'z a d'e barkou
'Vit stagan gand e labouriou,
E galon a ve sederet
Dre ar c'hân eus al laboused.

E vouez a vesk gand o moueziou
Evit kana meulodiou
D'an Doue leun a vadelez
A garg e barkeier a fronez.

III

Evel m'en devez eur fe gre
Ec'h anav eo digand Doue,
Mestr galloudek an elfennou (1),
E teu d'ezan e holl vadou.

(1) Danvez an traou, graet kement tra dioute.

Doue eo an deuz lakaet
Ar pezh an deuz an den hadet
Da wellaat pe da vervel,
Diouz ma kave ze mad pe well.

Petra 'dalfe d'an den poania,
Tempsi e zouar da hada,
Ma na rafe Doue d'an had
Dihoan, sevel ha dond da vad?

An arne c'hall kas da netra
An trevadou ar re gaera,
Hag an avel diskar ar gwez
Pa vent leun a vleun hag a frouez.

Neuze an den paour revinet
Na zastumfe na frouez nag ed,
Ha, hep dale, ar bed a-bez
A varvfe gand an dienez.

Mez, pa 'n em gav ar gwall-amzer
Da ankenia al labourer,
E ped Doue gand fe galed
Hag e bedenn 've selaouet.

Sant Izidor, e baeron ker,
A bed hen gant kalz a veoder;
Ha, goude, pa'z a d'e labour
E teu an elez d'e zikour.

Peurvuian al labourerien
A zo ar wella kristenien :
O fe nerzuz, o c'harante
A laouenna kalon Doue.

IV

Enor eta, doujanz ha gloar
D'an holl labourerien douar
A gar, dreist pep tra holl, o stad
Hag a ro d'o nesa skouer vad.

An holl a dle bepred d'eze
Doujanz, enor ha karante,
Pa eo divrec'h al labourer
A vag ar maeziou hag ar ger.

An dud zot pere o dispriz,
A c'hlaourenfe gand an naon kriz,
Ma vankfent, 'vid eun de hepken.
Da gas boed d'è d'en em zouten.

Me ho ped, labourerien ger,
Karet ho Pro hag ho micher,
Ha nan et ket dre ar c'heriou
Da glask labour ha micheriu.

A gemend a ya, er c'hiz-ze,
Dre ar c'heriou braz da vale,
Nag a hini 'zistro abred,
Leun a ziou. da glask o boued !

Bezef ato tud deread,
Madelezuz, a galon vad,
Bezef leal er marc'hajou
Ha tec'het diouz ar prosejou.

Diwallet diouz ar vezwenti
A ra da gemend a hini
Koll enor, yec'hed ha danve
Hag o ine, siouaz d'eze !

Al lore'h hag ar gwall-dispignou
A goll kalz a diegeziou :
O klask beva 'vel boure'hizien
E koueont en renk ar beorien.

Diwallet eta da ober
Dispignou foll ha diniver
Ha, koulskoude, disket ervad
Ho pugale herve ho stad.

Vertu, furnez ha diskamant
'Zo gwell evid aour hag arc'hant,
Mes diskadurez hep vertuz
A zo peurvuia gwall-noazuz.

Dibabet 'ta d'ho pugale
Mestrou leun a zoujanz Doue
'Vid o diski er skianchou
Ha, dreist pep tra, er vertuioù.

Hentef ato tud a galon
Feal d'ar wir relijion,
Ha tec'het diouz an dud difeiz
Evel denved 'dec'h diouz ar bleiz.

Sentet mad-ouz Doue bepred
Ha gouzanvet gant habasked (1)
Eus ho micher an holl boaniou
'Vit mont da ziskwiz en Nenvou.

IMPRIMATUR :

Brioci, die 27^a Februarii 1889.

M. LE PROVOST, *vic. gen.*

(1) Pasianted.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guillaume